




Gant an Doue madelezens
Eur c'halloud bras a burzudus
Da Gorneli zo bet roet
War an dud a war al loaned.

Pab benniget, Sant Korneli
Dalc'hit kristen, ato, pep ti,
Mirit tud, ha chatal ive
Eus peb darvoud, e peb mare.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 13 septembre 1927.


P. MESSEGER,
Vic. Gén.



Kantig sant Korneli

PATRON PARREZ TOURC'H

DISKAN



Kor-ne-li ben-ni-get, Pa-tron mu-ia ka-ret,



La-kit en hor c'ha-lon Eur gwir re-li-gi-on,




Di-wal-lit hon loa-nét euz peb drouk, peb klen-vet.



Kris-te-nien Tourc'h a greis ka-lon, Ka-nomp bu-



hez hor sant Pa-tron, Ka-nomp holl e-nor meu-leu-




di, Ha ben-nos da zant Kor-ne-li.

Er mare ze 'pad c'houezek miz
E chomas hep Pab an Ilis;
Rag, Dês, an impalaër romen
A waske start ar gristenien.

Dre c'hras Doue 'voe dibabet
Da genderc'hell roll ar Pabet
Eun den e hano Korneli
A blije kals da hep-hini.

Korneli a wouenn goz a nobl
Bepret dous a mad ous ar bobl
A oa direbech e vue
Glan a gorf, dinamm a ene.





Hed ar wech, al lezen gristen
Gavas war he hent stourmerien;
Tud a c'houlenn he ledanaat
Ha darn all a glask he strisaat.

Novat ha Novatianus
Daou héretik goal zanjerus
A glaskas chench lezen Doue
Dreist oll lezenn a drugare.

« Pardouni morse ne dleer
« D'ar pec'her vil na d'ar muntre;
« Hag ar re a zimez diou wech
« Evit sûr n'int ket direbech. »

A eneb ken fals kredennou
A nac'h nerz ar zakramanchou
Ar Pab a c'halv an Eskibien
Evit displeg ar gwir gredenn.

Ar c'honsil a ro testeni
Ema ar gwir gant Korneli
Kredenn an Novatianet
A vouez uhel voe koudaonet.

Doue bepred madelezus,
Hag ep muzul trugarezus,
Ne c'houlenn nemet rei pardon
D'an neb e glask gant keuz guirion.



Neuze 'tremenat eun amzer
A drubuil hag a waligner,
Ar vosenn war ar baianed,
Ar c'hlenvejou war al loaned.

« Doueou Rom zo fuloret
« O veza n'int ket enoret,
« Ar gristenien a zo kablus. »
A c'hop an impalaër Gallus.

Ha raktal war e c'hourc'hemenn
Brezel voe grêt d'ar gristenien
Stlapet kals e prizouniou moug
A staget kals all ouz ar groug.

« D'o lakaat da drei kein d'o feiz
« N'hellan gwelloc'h, a zouj ar bleiz
« 'Met ober d'o fastor tec'het
« Hag e vezin mestr d'an denved. »

Sant Korneli, harluet pell
En eur vro gouez, e Sentumsell,
A jom koulskoude, bepret Pab
War ziskibien Doue ar Mab.

D'e gennerzi, lizeriou kaër
En em gav, daoust d'an impalaër,
Digand an escob Syprien
Enor a gloar ar bobl kristen.

Skridou Korneli eus o zu
'Vel eur skleraën en arne du,
A laouenna ar gristenien
En o foan, en o anken.

A kaër hen deus an impalaër
Mont d'an dud dre dag pe dre gaër
Chom a ra stard ar gristenien
En o c'hredenn, en o lezenn.

Tamallet eo Sant Korneli
Da lakaat an dud d'enebi
Ouz urz ar re c'houarn ar vro...
Da Rom voe digaset en dro.

En eur prizoun striz eo dalc'het
Hag a enep pep gwir barnet:
Bourrevet eo 'n eur c'hiz' skrijus...
Hag e keit se 'pede Jesus.

Er bloaz daou c'hant daou hanter kant
Eo e voe dibennet ar zant
D'ar bevarzek a Wengolo
E voe kurunet en Envo.